



KAN-EURED

Komson gant an ao. MEVEL.

Ton nevez gant an ao. MAYET.




Tad, Mab ha Spered glan er ba-ra-doz o ren, Tri fer-son



e - vu - rus en eun Dou - e eb - ken. C'hui hag o peus krou-et an



nenv hag an dou - ar E - vit ho ka - ran - tez hag e - vit ho klo -



ar: As - ten-nit, en deiz - ma, var daou bri-ed kris - ten, Ho



tourn holl gal-lou - duz, ma ve-zint eur skeu - den Eus




hoc'h un - va - ni - ez Hag eus ho san - te - lez.

I

Tad, Mab ha Spered glan, er baradoz o ren,
Tri ferson evurus en eun Doue hebken,
C'hui hag o peus krouet an Nenv hag an douar
Evit ho karantez hag evit ho kloar:
Astennit en deiz-ma, var daou bried kristen
Ho tourn holl-gallouduz, ma vezint eur skeuden
Eus hoc'h unvaniez
Hag eus he santelez.

II

Tad o peus, en Nenv, eur Mab ouzoc'h henvel,
A bep amzer ganet, ker mad ha ken uhel,
E fell deoc'h rei dreizan, da gement den a zo,
Buez vel hoc'h hini, ato treac'h d'ar maro;
Evel ma roit bleunioù da bep nevez amzer,
E ti ho pugale lakit buez seder
Hag ato levenez
E serr ho karantez.



III

O Mab gloar an Tad, bepred en e gerc'hen
 Hag eus e vadelez mellezour dirouven,
 C'hui ho peuz kemeret korf hag ene dister
 Evit doni er bed-ma da veza hor Zalver :
 Roit gras da bep pried d'ober 'vit egile
 'Vel peus gret hoc'h-unan e kenver pep ene,
 O rei deomp ho puez
 'Vit hor silvidigez.

IV

Ha c'hui Spered Santel, tan beo ar garantez,
 En Tad hag en e Vab, ni vel, dre o furnez,
 En dro deomp er bed-ma, an urz o ren pep tra.
 Ha gened hon Doue dirazomp o para:
 Ama renevezit kalon an dud nevez
 D'o lakat d'em garet dre nerz ho karantez,
 Hag o dezo bepred
 Brasoc'h evurusted.

V

Jezus, Mari, Joseph, e tiik, Nazareth
 Skeuden ken burzudus an uhella Dreindet,
 C'hui ho peus digaset an Nenv var an douar
 O veva 'vit Doue er boan hag er c'hlac'har:
 Seladuit pedennou kerent ha mignoured
 O c'houlen diganeoc'h evit an daou bried
 Peb vad hed ho buez,
 Dreist oll ho karantez.

CL. MEVEL.

Imprimatur,

Kemper, 20 guengolo 1930,

P. MESSENGER.

Vikel-Vras.

